




Johannes Gutenberg (1400-1468)

Bec'h d'ar moullañ !

Ha klevet 'peus kaoz diwar-benn Gutenberg a savas an teknikoù moullañ e-tro 1445* ? Berzh bras a reas ha buan e oa bet savet tiez-moullañ un tammig e pep lec'h en Europa. E 1484 e oa bet moulet al levr kentañ e Breizh, da skouer. Ha betek fin an XIX^{vet} kantved e oa bet implijet ar memes doareoù d'ober.



- 1 Dibab al lizherennoù unan-hag-unan evit sevel pep frazenn.
- 2 Pep frazenn zo da lakaat en ur framm evit sevel ur bajennad.
- 3 War pladenn ar voullerez e c'haller lakaat meur a framm asambles. Diwall mat diouzh peseurt tu e laki pep hini !
- 4 Gant an tapon ez peus da lakaat an ankr war an holl lizherennoù.
- 5 Ha bremañ e vo gwasket ar follenn ouzh ar framm.
- 6 Laoskomp al liv da sec'hañ ur pennadig, a-raok moullañ an tu all.



- 7 Ha bremañ e c'hellez plegañ ar follenn vras evit sevel ul levrig. E n'eus forzh peseurt levr ez peus meur a levrig gwriet pe peget asambles.

*E Bro-Sina e oa bet ijinet ar paper, an ankr hag an teknikoù moullañ kentañ e gwirionez. Met ne oant ket anavezet en Europa. Abalamour da se e vez graet ijiner ar moullerezh eus Gutenberg.

Ar moullañ e Breizh er ^{xv}^{vet} kantved



Frañsez II, duk Breizh
(1435-1488)

Ar moullañ a erruas e Breizh e-pad ren Frañsez II, tad Anna Vreizh, 40 vloaz goude Gutenberg.

Moulet e oa bet ar follennoù kentañ e Brehant, e 1484. Al levrioù moulet en Europa a-raok ar bloavezhioù 1500 a vez graet henvoulladurioù anezho, *incunables* e galleg. 22 henvoulladur a seurt-se a oa bet moulet e Breizh. Ar *C'hatolikon* zo unan anezho, an hini nemetañ a gaver brezhoneg ennañ.



Merk « Yves Calvez », mouller ar *C'hatolikon* e Landreger.

*A ante b
b. ent abil/ent abiloch/ent purabilaff
Abim. g. abisme. l. hec abiffus abiffi
Abit. g. habit. l. hic habitus/tus/tui
Abitaff. g. habiter. l. habito/as/au/atuz
g. l. actuz. Inde hic e hec e hoc h bitas/ris
g. habitat. Item habitus/ta/tum. g. habitus
Item hec habitatio/nis. g. habitacion. Item
habitudinar/um. ga. celuy qui habue
aucune chose qui appartient a habitude. Item
hoc habitaculu/li. g. habitacle. b. idē. Item
vide in habitaff
Abloz en dfoez. Gallice bay en an. lat.
annuatim aduerbium temporis
Abostol. g. apostre. l. hic apostolus/li. Item
Ista del lisen/vevraice. Item hic apostolatus
tus/tu. g. office d'apostre. Item hec episto
la. l. g. epistre. b. abostol. Vnde epistola
larum/tu. g. epistolier. b. abostolier. Item
hec epistolare/li. idem
Abon march. g. fiend de cheual. latine.
Sec rudus ruderis
g. l. hoc supatū/li. Inde
Iste*



Ar *C'hatolikon* zo ur geriadur bet moulet e 1499 e Landreger, diwar dornskrid Jehan Lagadeuc savet e 1464.

N'eo ket n'eus forzh peseurt geriadur avat, peogwir eo ar geriadur kentañ moulet e brezhoneg, e galleg, e latin, hag ar geriadur teiryezhek kentañ er bed kristen.

◀ Ur bajenn eus ar *C'hatolikon*

Istorig ar moullañ



■ En India pe e Sina e oa bet ijinet an ankr, ouzhpenn 6 000 bloaz zo.



■ 6 000 bloaz zo, e Mezopotamia, e veze implijet sielloù e stumm ur ruilhenn evit merkañ tresadennoù war ar podoù pri.



■ 5 500 vloaz zo e veze skrivet war plakennoù pri, e Mezopotamia.

Strasbourg

Sinaï

Mezopotamia



■ Ar paper koshañ bet kavet zo bet dizoloet e Sina en ur bez kozh a 2 100 vloaz. Gant kanab e oa bet graet.

Korea

Sina

𐤀 𐤁 𐤂 𐤃 𐤄 𐤅 𐤆 𐤇 𐤈 𐤉 𐤊 𐤋 𐤌 𐤍 𐤎 𐤏 𐤐 𐤑 𐤒 𐤓 𐤔 𐤕 𐤖 𐤗 𐤘 𐤙 𐤚 𐤛 𐤜 𐤝 𐤞 𐤟 𐤠 𐤡 𐤢 𐤣 𐤤 𐤥 𐤦 𐤧 𐤨 𐤩 𐤪 𐤫 𐤬 𐤭 𐤮 𐤯 𐤰 𐤱 𐤲 𐤳 𐤴 𐤵 𐤶 𐤷 𐤸 𐤹 𐤺 𐤻 𐤼 𐤽 𐤾 𐤿

■ 3 500 vloaz zo, e Sinaï, e veze implijet ur skritur hag a zo mamm an holl skriturioù modern er C'hornôg.

India

IX^{vet}

XV^{vet}

VII^{vet}

XII^{vet}

-4 000 -3 500

-1 500

-87

▲ Ar moulladurioù kentañ war baper bet kavet a oa bet graet e Sina er VII^{vet} kantved. Moullet e veze neuze tresadennoù gant sielloù. Pep pajenn a oa ur siell.

▲ En IX^{vet} kantved e vez kavet skridoù gant an tresadennoù.

▲ En XII^{vet} kantved ne veze ket savet ken ar pajennoù gant ur siell, met gant meur a hini. Ur ger a oa war bep siell.

▲ Er XV^{vet} kantved e rae ar Goreaned gant sielloù hag a dalveze pep a son.

▲ E-kreiz ar XV^{vet} kantved e krogas Gutenberg d'ober gant lizherennoù distag.